


O pa oan Plac'h yaouank!

D'am mignonez Virginie CAUREL, Plougerneve.

Andantino (♩ = 100)




Ma c'ha-lon a zeu da dri - dal, Ma c'ha-lon



a zeu da dri - dal, pa son-jan en am-



zer gwe-chall... O pa oan plac'h yaou-ank!



Ya, pli-ja-dur am oa, Pa oan en oad a dri-wec'h vla.

Ma c'halon a zeu da dridall,
Pa zonjan em amzer gwechall.

Diskan:

O pa oan plac'h yaouank!
Ya, plijadur am oa,
Pa oan en oad a driouec'h vla.

Pegen dous e oa levezeg
Neve-amzer ma buhegez!
Sonjou tener ma yaouankiz,
Hunvreou kaer, deut war ho kiz...

Grêt d'in adhevan, eur pennad,
Ho karante hag ho c'houez vad.

Deut gant gened, joa, kaniri,
Mignonezed, c'hoarz ha dudi...

Lec'hioù dispar, traouiennoù frank,
'Lec'h em eus hunvreet ken stank,

O silaou an evned seder
Hag o kutuilh bleuniou tener,
Koulmig dinec'h ha dizoursi,
Kanan 'oa ma brasan dudi.
Luskellet gant zon dereat,
Dudius e ve labourat.

Bep sul, d'an hanv, d'ar pardonioù,
Bep noz gouanv, d'an neadegoù.

Buhe evrus, devezioù kaer,
Tec'het oc'h dirak an Amzer!

Tarnijet oc'h 'vel eun hunvrê:
Hoc'h envor eo heol ma buhe.

Kreiz ma zrubiilh, ma melkoni,
Me 'gan evit 'n em frealzi.

FILOMENA CADORET. (Koulmig Arvor).